

Er skolaj hon eus ar chañs da gaout un hentad divyezhek, pemp den zo er strollad:

Me eo Armand, 10 vloaz on. Emaon o chom e Gwengamp. Me a blij al loened hag an natur din. Ar skol, ar gouren ha kalz traoù all a blij din. Ne blij ket ar saotradur hag ar c'hevnik din, nag ar pichoned hag ar sport.



(_/)
(='.'=)
(<_<)

Demat deoc'h! Louise eo ma anv, plij' a ra din dañsal, dañs jazz ha dañs klasel a ran. Plij' a ra din tresañ ivez. Ur c'hazh hag ur pesk ruz 'm eus. Ganet on bet e Sant-Brieg, 11 vloaz on. Ur c'hoar vihan 'm eus. Er 6^{vet} 1 'on. Er c'hlas zo 5 den o teskiñ brezhoneg, seizh den warn ugent omp en holl. A-raok e oan er skol Christian Le Verge e Plouvagor. Jim (korfembregerezh) a ran. An arzoù kaer eo ma danvez muiañ-karet hag an tekno ne blij ket din. Plijout a ra din debriñ fritez ha pizza.



(_/)
(='.'=)
(<_<)

Louen eo ma anv. Deus Kervoroc'h on. 10 vloaz `m eus . `Barzh ar skolaj Jacques Prévert `on. Pevar c'hazh `m eus : Tipex, Arzig, Bang hag an hini bihan: Arzoug. Plij' a ra din ober c'hoarioù, debriñ kouignoù stivell, ar c'hizhier, filmoù Myazaki, traoù deus bro Japan.



Kouignoù stivell



Orpha eo ma anv, 11 vloaz on. Ganet on bet d'ar 14 a viz Ebrel e Kallag ha bremañ emañ o chom e Pabu. Plij' a ra ar sport din, ober teil tomm, ar Brezhoneg, ar Matematikou, ar saozneg, al loened. C'hoari a ran echedoù, keginañ a ran, lenn a ran dreist-holl ar MANGA. Ar skolaj Jacques Prévert , ma familh, debriñ kalz traoù disheñvel hag ar vell-droad a blij din. Teir c'hoar `meus: Lucie, Louann ha Klervia. Ur gazhez `meus: Valkiri eo hec'h anv hag ur c hi, Opie eo e anv . Ma bro muiañ-karet eo ar Japan. E 6^{vet} 1 `on, seizh den warn ugent omp en holl. Plij' a ra kalz din lenn ar manga NARUTO. Lenn a ran kalz a levrioù. E skol ar Yezhoù e oan e Pabu. Ne blij ket din al labour noz, ar c'hevnid. Ar gwagennoù bihan ne blijont ket din met ar re vras a blij din hardi!



(_/)
(='.'=)
(<)_(<)

Yaya 'vez graet ac'hanon.

11 vloaz 'meus, ganet e oan d'an 19 a viz Mae. Me 'oa e skol Pabu divyezhek. Plij' a ra din c'hoari er-maez hag ober sport. Er-maez ar skol e ran piano ha badminton (plij' a ra kalz din!). Ur pemoc'h Indez 'meus, Stitch eo e anv. Plij' a ra din ivez selaou sonerezh evel Dua Lipa (ur ganerez eo), an arzoù-kaer a blij din. Ne blij ket din ar matematikoù nag ar saozneg. Ma bro muiañ-karet eo Italia peogwir eo brav. Ar gwagennoù a blij din evit neuial enne.



(_/)
(='.'=)
(«)_ («)